

KENAVO

**Pelerinach Eskopti Kemper ha Leon
da Intron Varia Lourd.**

VAR TON : *Me glev eur vouez tener ha klemmuz.*

DISKAN :

Kenavo, Mari !...
Pedit 'vidomp-ni
Bugale Breiz deut a ger pell...
Rag ni gav c'houëro
Distrei en hor bro :
Ama e ve ken dous mervel !... (Bis)

I

AN ENV E LOURD.

Nan, n'eus plijadur paduz ebet
Evidomp var an douar-ma !...
Dious Lourd ha dious he Gao benniget
Siouas ! e rankomp kimmiada !...

Evel eur bugel, pa goll e vam,
Na c'hell ket miret da vouela,
Ous ho kuitaat, o Guerc'hez dinam
Ni sant hor c'halon o ranna...

Kals re verr int bet an tri dervez
Hor beuz gellet ama tremen !...
Ni a voa ken braz hon levenez
O taoulina en ho kichen !

Eb tanva, nan, den na goumprenfe
An eur-vad a gaver ama :
Rak ken dous eo ma choum an ene
Sebezet-oll gant he joa...

II

AR JAPEL.

Tridal a reamp gant hon eürustet
O stoui var leur ar japel
Zo bet dre hoc'h urz, Mari, savet
Azioc'h eun andret ker santel (1)

(1) D'an 23 a vis C'houevrer 1858 ar Verc'hez o komz ous Ber nadet a lavaras dezhi : «..... Ha brema, va merc'h, it, it da lavaret dar veleien penaos me c'houlen e ve savet eur japel digu ama... »

Oh ! nag hi zo skedus da velet
Goloet-oll gant ar banielou
A vouestl d'ho mam ar belerinet
Dre ma teuont a beb broiou !

Nag e choumet estlammet pep-unan
En eur lenn, hed he mogeriou,
Kement a daolennou-marbr guen-kan
Merket varnho kals miraklou !

Na peger c'houek e pedemp enni
'Vit hor c'herent, hor mignounet,
Ar Pab, ar Frans, Breiz, evidomp-ni,
Hirio gant Doue goal gasset !

Nag a vech, epad peb prezegen,
O deus puill redet hon daëlou
Ker mad e kave ar veleien
An tu da douch hor c'halonou !

III

AR C'HAO GANT SKEUDEN AR VERC'HEZ.

Mes piou lavaro petra santemp
En eur staga hor muzellou
Ous ar Roc'h benniget a velemp
'Gis m'edoa pad ar burzudou ?

Rag varnhi c'hoas a lintre skedus
'Vel e kreiz an nevez-amzer
Ous ar vezennik mirakuluz
A zougas treid *an Introun gaër*. (1)

O Mari, nag hen zo dous sellet
Ous ar skeuden a verk ar plas
M'ho kuelas trivac'h guech Bernadet
Gant ho saë ven, ho kouriz c'hlaz...

Kaër oc'h gant ho taouarn astennet
Ho taoulagat savet d'an Ee ;
Kaër gant hoc'h hano a uz skrivet
Oc'h annous glandet hoc'h ene.

Bepret ni grede var ho muzell
Lenn ar mousc'hoars an tenerra :
Rag c'hui hor c'har, ni, tud Breiz-Izel
Ha bugale Santes Anna.

(1) Epad an derveziou o deus tremenet e Lourd varlene, pelerinet Eskopti Kemper, o deus gelllet guelet diou fleuren dam-zigor ous ar vezen-roz-gouez var behini e lakaas ar Verc'hez he zreid pa apparissas da Varnadet.

Dre se dirazoc'h, Guerc'hes dinam,
Hardissoc'h ama ni bede,
'Vel al labous, e kichen he varn,
A gan joüssoc'h d'ar beure...

IV

DOUR BURZUDUZ AR FEUNTEUN. — AR GLANVOURIEN ER C'HAO.

Bep mintin, goude reseo Jezuz
E reamp ouzoc'h hor goulennou
N'eur eva eus an dour burzuduz
A ra kement a viraklou

Æz oa, dious ar prez a ve varnomp,
Koumpren brasder hon izomou :
Oll, vit hor c'herent pe evidomp
Hon doa defot eus ho krasou.

O dousa daëlou hor beuz skuillet,
Neuze pa reamp deoc'h hor peden
'Vit hor c'hlanvourien ker a zouget
Eus an dour a vel d'ho skeuden

Nan, den ha na vije tenereet
Ous ho guelet leun a fizians :
Var ho zremm kel laouen e lennet
Ho feiz bev hag ho esperans.

Er C'hao a possubl ve disfiziout
Dirak kement a vranellou
A rent testeni deus ho kallout
Kouls ha niver ar pilejou ?

Oh! roit, roit dezho-ta ar pare
A gav kement a dud ama !
Rag bez'ez 'int oll ho pugale...
Marteze ho karont guella!...

V

AR PROSESSION VAR AR MENEZ, EN DEIZ.

Hervez ho kourc'hemen, o Guerc'hez
Hor beus gret *prosessionou* (1)
Var dro ar c'hao ha var menez
Zo c'hoas gantho c'houez an Envou.

(1) « Je veux qu'on y fasse des processions..... » (app. du 23 février.)

la, bet omp var lein ar menez-ze
'Zao ken buel dreist ho chapel,
En hor penn, hon diou banniel neve
Skedus gant hoc'h Imach Santel. (1)

Varnho Sænt-Patroun hon Eskopti (2)
Nag e z'oant kaër, en eur bignat,
Dindan ar bannou-eol o lintri,
Gant an avel o vransellat ! . . .

Oh ! nan, den na sante he skuisder
Daoust d'an hent hir, soun ha meinek,
Ken dudiuz e skiltre an ær
Gant hor c'hantikou brezounek

Da biou na lamme ket he galon
Pa reamp al lè, oll unanet,
Da joum d'ar Pab bugale guiriou,
Katholik ha Bretoun bepret ! . . .

En hon touez piou na vguele ket
Pa bedemp *Rouanez Arvor*
Da vinnig ganeomp pelerinet,
Hon tuð hag er ger ha var vor ? (3)

VI

AR PROSESSION-NOZ GANT GOULOU VARDRO AR C'HAO.

Pedo ar steret o lugerni
Pebes dudi oa hor guelet
Eur c'houlaouen e dourn pep hini
Ous he c'houzouk he japelet ! . . .

Na kaër oa neuze Guerc'hez ar c'hao
Sklerijennet e kreiz an noz,
Ha ni, daoulinet oll tro-var-dro,
Diouthi o c'houlen he bennoz !

(1) Var lene pelerinet Kemper o doa kasset gantho da vinniga da Lourd diou baniel nevez ha var bep hini, deus eur c'hostez, edo Imach Introun Varia Lourd.

(2) Unan eus hon diou banniel a zouge, ouспен Imach Introun Varia Lourd, skeuden Sænt Caourintin, Eskop Kerne, hag eben hini Sant Paol, Escop Leon.

(3) Reine de l'Arvor nous te saluons !

.....
Bénis nos foyers, bénis nos enfants,
Bénis avec nous tous les chers absents.
Bénis nos marins.....

Na kaër e save dreist trouz ar ster
 Kan dudiuz hor c'hantikou
 Losket gant eur bobl tud eb niver
 Deut keit ama dious ho broiou !..

Na kaër en dro deomp, ann traoniennou
 Gant an ekleo a dregarne,
 P'oant an eil d'eben, dre ar meziou,
 O tiskana : Ave..... Ave !...

Na kaër oa guelel nemet goulou,
 Goulou en traon, goulou varlaëz.
 O steredeni dre an deliou
 Pa zeamp goude dre ar Menez ! (1)

Ne kaër oa sked ar gurunen-dan
 A furmemp oll, en eur achui,
 P'oamp bodet egis eun hed-guenau
 En dro d'ho skeuden er vali !

Ia, en env e kave deomp beza
 Kement oa braz hon levenez,
 Ken dous pep tra d'hor c'halon ama
 Ac'hanoc'h a gomze, Guerc'hez ! (2)

VII

RANN GALOUN AR C'HIMMIAD. — HOR BENNOZIOU D'AR VERC'HEZ.

Mes perag hirio, perag gouela
 Mar, doamp neuze ken evuruz ?
 Perag omp ken trist o taoulina
 Dirazoc'h, mam garantezuz ?

Evel ar fleur a deu da voenvi,
 Ar bonheur na bad ket ato...
 Siouas ! arruet heur an disparti,
 Ha bremaik da Vreiz ni zistro !...

Oh ! sur, n'eo ket brassoc'h he c'hlac'har
 D'ar merdead o kuitaat he vro
 'Vit deomp-ni, n'eur zistrei d'ar gear,
 O lavaret d'eoc'h *kenavo*...

(1) Les *lacets* pour aller de la Grotte à la Basilique.

(2) La grande statue couronné...

Bennoz, ia, mil bennoz gouskoude
D'hor beza karget a c'hrasou
Ha roet d'ar c'hlanvour n'eo ket pare
Kourach da c'houzaonv he boaniou !

Bennoz c'hoas, rag m'hon deus esperans
E teui, prest, triomph an Ilis,
Hag e tizroi hor bro ger a Frans
D'he gened ha d'he guillantis.

Ni he bugale, *rai pinijen* (1)
'Vit ma velo he dallentez,
Hag evit hor breudeur pec'herien (2)
Startoc'h ni a bedo bemdez.

VIII

HEUR AN DISPARTI !

An tremeniad eus eul lec'h karet
A gemer ato tra pe dra...
Eus al lec'h-ma dreizoc'h santeleect
Den, sur, na c'hell mont eb petra...

Guelit, na pet a zastum gant prez
Bleunv pe zeliou a zivar-dro :
« Marteze, laront-hi, ar Verc'hez
« E deus eur vech sellet outho !... »

Nag a zo c'hoas ous Roc'h Massabiel
O touch kroaziou, metalennou
Imachou deus ho skeuden zantel,
Hag, eb niver, chapeledou !

Tud ar ger, stard, ho deus hor pedet
Da gas d'ezho, 'vel eun tenzor,
Traou bet e Lourd memes benniget,
Hag a zougint gant kals enor.

« Gantho e kreiz tarziou guen ar mor
« E vezimp dizaoun, emezho :
« Rag he sell dezhi varnomp digor
« Dious pep goalheur hon diouallo. »

Eur c'har, eur mignoun var he vele
Deomp, p'ho c'huiteemp, o deus laret :
« Dour eus a Lourd, sur, am parefe...
« Oh ! ma vije dign digasset !... »

(1) Pénitence ! Pénitence ! Pénitence ! (App. du 24 Février.)

(2) Priez pour les pécheurs ! (Appar. du 21 Février.)

Ous he garga er feunteun, aze.
E santemp oa braz hor fizians :
Perag e Breiz na ve ket ive
An dour ma dour a bareans ?...

IX

KENAVO !... KENAVO !...

Brema, 'vel tud o vont d'an harlu,
Pell dious ho bro hag ho c'herent,
Ni zell, trist, eur vech c'hoas, tu ha tu,
Ous al lec'hiou gariemp kement...

Kenavo-ta, chapel benniget
A zao ker koant var ar reier...
Achu, achu, eo hon eürustet :
Na glevimp ken soun da gleier...

Nan, aoteriou sakr ec'harz pere
Eo ken dous pedi ha kana,
Na deuimp mui, da bep poent eus an de,
Dirazoc'h oll da zaoulina !

Nan, menezioù ker guen da velet
Gant al linser-erc'h ho kolo,
Mui na glevot mouez ar Vretounet
Kasset a-bell gant an ekleo !

Rag ne dimp ken dreizoc'h, plasennou,
E prosession ker brao renket,
Kel laouen oc'h heul hor banielou,
E kreiz an noz steredenned !

Kenavo ive, ster hibouduz,
A red eb paouez diraz-hi...
Nag a bet a vije evuruz
Da joum ato ken tost dez-hi !...

Kenavo dreist-oll, kao Massabiel,
Ken kaër gant da aoter skeduz
O lugerni 'c'harz ar Roc'h santel
A zoug skeuden ven Mam Jezuz !

Oh ! nag e kariemp ama stoui,
En hon daouarn hor chapelet !...
Evidomp-oll oa ken dous pedi
Er plas ma pede Bernadet !

Nag e z'oamp joañz, Guerc'hez dinam,
En dro deoc'h oc'h en em voda,
Evel bugale en dro d'ho mam
'Vit diskuez piou he c'har muia !

Petra eo-ta eürusted an Eè
M'ar tanver met ar skleur ama !
Oh ! grit ma zaimp-ni di ive
Hag e rankfemp souffr er bed-ma...

Ar fizians-se ebken hor c'honsol
N'eur gimiada diouzoc'h, Mari...
Siouas ! nag a bet ac'hanomp oll
Na n'hellint da Lourd mui dizrei !

Mes bepret er bed-ma c'hui zalc'ho
Evidomp ho kalon digor
Ha bepret ive ni ho karo,
Duhont, en hor bro ger Arvor...

Aliessoc'h en ho chapeliou
Ni a ielo da zaoulina,
Hag eno, dirag ho skeudennou,
E kredimp c'hoas beza ama...

Deus a Lourd hor bo sounj dreist-oll
N'eur velet ar banielou-ma
Pa zimp da Folgoat pe Rumengol (1)
Iviziken da bardouna !

.....
Mes poent diblas... N'hellomp mui dale...
Eur zell ken d'ho skeuden er c'hao...
D'ar Roc'h c'hoas... oh ! ia,... eur pok ive...
Ha brema, Mari, kenavo...

DISKAN :

Kenavo, Mari !...
Pedit 'vidomp-ni
Bugale Breiz deut a ger pell !...
Rag ni gav c'houëro
Distrei en hor bro :
Ama e ve ken dous mervel (Bis) !

(1) An diou baniel nevez a ioa kasset da Lourd var lene a zo roet unan da Ilis Folgoat, hag eben da Ilis Rumengol...